

# CANTIC

## AR BUGUEL PRODIG.

*Pehini a zo meurbet profitabl da zisquez d'an  
dud yaouang da zioüal diouz ar guïn ha  
diouz ar merc'het.*

*Var ton ar Falz Pinvidic.*

**E**N TENTITT oll Bretonet, hac e cléfot cana,  
Buez ar Buguel Prodig, mar gallan'disclecia :  
Plijadur ho pézo sur, mar qirit ententi,  
Ha profitabl eo ive ous tad ha mam senti.

Cetu amàn en antier buez ar Mab Prodig,  
A voa en e liberte abaoue yaouanqic;  
E dad, e vam en leze da c'hoari ha tripal :  
Diouz goal compagnunezou e tle peb den dioüal.

Calz a dud so er bed-màn ha ne sourcoint qet  
Pe a lec'h e teu madou, pa n'o gonezont qet,  
Evit o drouc implija ne reont câz a ze :  
Nep o deus-e gonezet o deus bet poan gante.

Tad ha mam mē ho suppli, ha mestr ha mestrezet,  
 Corrijit an dud yaouanq, ha dalc'hit-e sujet ;  
 Disennit oute ar guin, an c'hartou, an dansou :  
 Cassit-e d'an Oseren ha d'ar Chatekismou.

Clêvit eH, tud pinvidic, pa oc'h eus ar voyen ;  
 Corrijit hor pugale hac ho servicherrien ;  
 Na roit get liberte en yaouanqis dê re :  
 Disquit dêze oll abret da servicha Doue.

Grit dêze monet bemde da glêvet oferen ,  
 A bella dious an den pep seurt goal blaneden ;  
 Enni ez eus un tenzor hac a so caer meurbet ,  
 Represanti Passion hor Zalver beniguet.

Emàn voa un den yaouanq ha na rē cas ebet  
 Pe a lec'h e teu madou, pa n'o goneze qet :  
 Qer prompt, evel ar grizill pe ar gliz e mis mae  
 Vize an arghant gantau, cher yad, t'hoari a rē,

Ur spaç a amzer e voe e ti e dad maguet ,  
 Madou bras a zispigne , ha na rē cas ebet ,  
 Gant ar c'hartou, an dansou, ar guin hac ar merc'hot  
 O tispign en un devez tostic da zaou c'hant scoet.

Ne voa nemet pemee vla pa c'houlennas qenta  
 E bartach diouz e dad, ma carje e rēi dezâ ;  
 Mes e dad a estime, pa vije deut en oad ,  
 E teuje dezâu sqiant pelloc'h da evessât.

E dad hac e vam bemde a bede evitâ  
 Jesus hac e yam Mari da rēi ar c'hraç dezâ



Da veza un den honest, evel ma oant-y bet;  
Èvit qement m'er pédent, oute ne zente qet.

Un devez e lavaras sur d'e vam ha d'e dad,  
Me renq hirio caout arc'hant evit ober cher vat;  
Me a zo un den yaouanq eus a gondition,  
Haç a renq ober cher vad gant an dud a fêçon.

Pa voa pemp blosas varnuguent, e lavaras d'e dad :  
Me a tanq caout ya fartach bremâ en ur yalc'hat ;  
Me a yélo da vale evit quelet ar vro ,  
Ha ma cavân va fortun un tu , m'e c'hemero.

E dad a tespont dezà gant carante heprez :  
Me ro va bennos deoc'h gant carante barset;  
Ho pezit sonch a Jesus, ne ancouait qet  
Ar c'homzou en deus ho tad alies lavaret.

Neuze e roas e dad dezàn trégont mil scoef  
En aour fin hac en arc'hant en ur yalc'hat contet :  
Cetu aze ho partach, pa fell déc'h hor c'huitât :  
Doue roî deoc'h e c'hraç d'ober ur veach vat.

Qenta repas a eute ar Prodig obstinet  
Voa en un hostaliri gant ur vanden merc'het,  
Servichet mad voe eerten en deis-se da goania,  
Sonerien evit dansal, plac'h coant da seryjcha.

Pa vise'r gompagnuez ous an daol azeet,  
E voa en e blijadur ha gantân ar merc'het ;  
Qeit ha ma pade arc'hant, cher vat a rent gantân,  
Plijadur bras a gayent ober goab anezân.

P'oa dispignet e arc'hant, e vije trist meurbet,  
 E lar d'e gompagnuez n'en deus liard ebet;  
 Mes ractal e hostises dezàn en deus respontet :  
 M'o tivisco, compagnut, ma na ven-me pêt.

Pa voa goastet e arc'hant, ne voa netra chomet ;  
 E falle dezàn c'hoari, ober cher vad bepret ;  
 Mes a doliou qeuneuden' e voe prest qempennet ,  
 Tennet é vleo ous e ben ha gerqent divisqet.

Goude ma voe chasseet eus an hostaliri,  
 N'en dévoa qet a zillat, mac a vœd da zebri ;  
 Un drue voa e glêvet o criâl en hentchou ,  
 Gant riou ha naon, en devoa goude e oll cheriou.

Neuze e tistroas c'hoas d'ar guêr da dy e dad ,  
 Evit goulen da loja evel un tremeniat :  
 En han' Dope, emezàn, m'ho ped hac ho supli  
 Da loja un tremeniat so scuis ha na ell mui.

Pa voa lojet gant e dad , n'en anavee qet ,  
 En a ouye an doare , mes n'en disqueze qet ,  
 Pa voant êt oll da gousqet, én a gassas ganta  
 Vesseliou aour hac arc'hant démeus ar re gaëra.

Neuse en em gavas prest gant he hostaliri ,  
 Hac en devoa evite da eya , da dibri ;  
 Qeit ha ma padjont outan bepret e rôcher vat ,  
 Mes ne hadas qet pell bras ar vech-se ar yalc'hat.

Neuze, e voe tracasset , injuriet gante ,  
 Evel eur forhan basnet voa da velet neuze ;

Hac o tonet da zonjal e voa ur pec'her bras,  
Pa voe bolonte Doue en em gonyertissas.

Pa zonjas en e vuez, e sellas ous an se,  
O sellet pebes fortun beprest a rancontre ;  
Monet a eure neuze, goude e voal vue,  
Da evessa al loened o tistrei ous Doue.

Monet a eure neuze d'un ty da servicha,  
Ma vije o bolontez da rei souten deza.  
Me chomo da labourat en arat, mar queret,  
Pe autramant me a yel da viret al loenet.

Neuze e laras dezàn ar merer ac'hane :  
N'anduràn qet an dud scàn a ve bet o vale ;  
Me meus tud da laboufat qement hac a so ret,  
Nemet da viret ar moc'h mar queret e chonjet.

En han' Doue, emezàn, va mestre, me ho supli,  
Me rai vel ma lavaret : va mirit en ho ty ;  
Mar gallan ho servicha evel ma leveret,  
Qeit ha ma plijo ganec'h evit caout un fain boed.

Neuze e zeas ar Prodic da vessa ar moc'h-se,  
O tont da gonsideri guechal en e vue,  
En devoa grêt cheriou mat, ha drouc distribuet,  
Ha bremâ en paourente n'en devoa esqen boed.

Un druez voá e glêvet en noas beo o crial,  
Gant paourente ha fatic goude e reus fall ;  
Gant naon e voe surprenet qen a rancas dibri  
En ul laouer gant ar moc'h a hep seurt vileni.

Guell ve da un den certen beza nao de var yun  
 Eguet ober re gorfat, na beza disasun,  
 Coll a ra e zantimant neuze gaat re gorfat,  
 Ha m'ar caret e lezel, e xai un drouc benac,

Beza escus debochet ha drouc implicit madou,  
 Ar merc'het fall hoc ar guin so sos da valeuriou,  
 Ha goude ar foll despign e zeont d'en em ganna;  
 Cetu siouas maleuriou, goude drouc implija.

Peguen lies a den sur a so var ar bed-màn,  
 A so bet pinvidic bras, allas! zo paour brennà!  
 Goude prodigalite, eva guin ha c'hoari,  
 E vezò trist ar Prodig, ma ne ve da zibri.

Goude e foll despignou, cota en distroet  
 Da veza den gracius, hambî meurbet ha parfet;  
 Pa voa bolonte Doue en em gconvertissas,  
 Hac e tenas ar vech-se d'ar guer morchedus bras.

Goude-se en em rentas e qiehennic e dad,  
 Hac e teuas da sonjal gant ur volonte vat :  
 Autrou Doue, emezàn, ha m'em be hardisson  
 Da vonet dirac ya zad, ha me qen diréson?

Me a ya en han' Doue, emezàn, da antren :  
 Deis mat déc'h, c'houi a bedan, cetu ho courchement,  
 Cetu ho nab hirvoudus : lavaret mad ho poa  
 E yizen e paourente, ma ne garjen poania.

Va mab, me a so joaus d'ho peza distroet,  
 Meulet brennà a galon ar Verc'hes beniguet;

Me am'boa digant Dóue pell a zó desirer,  
Evit clévet ho toare, pelec'h e vijec'h ét.

Me so ar maleïtrussa a vos biscoas er bed :  
En hanro Jesus ha Mati, va zad, va fardonet :  
Me meus goal distribuet ar pez ho poa roet  
Din da ober va frofit, ma carien o miret.

E dad a jaras neuze d'e oll servieherien :  
Ret es laza en ean'laz, tu o'ch huc us eugen ;  
Da ober ur banget caez d'am-naab so distract ;  
Ret eo doat, va zad qeaz, varc'hoas d'e velet.

Oaz a dud so er bed a evel ar Mab Prodig,  
Hac a so anval ite ens ar Fals Piavidie ;  
Ez béd-mañ eo e gevont ana o baradec,  
N'o deveus sonch a Jesus hac e van ar Verches.

Me ho supli, etad yaouatiq'a bep sont qalite,  
Tud a bep condition, hac ar re goz ive,  
Dious goal compagnuez da divoal bepret  
Ar c'hoari, an nosveziou, ar guin hac ar merc'het.

Ar re-se, siouas ; a so'da gals occasion  
Da ober cals maleuriou hac o daonátion :  
Caledet int nos ha deiz ebars en o fec'het,  
Fê eo gant cals o c'helen en bent da veza salvet.

Ma caremp consideri en Mari-Madalen,  
So en em gonvertisset gant ur sermon hepken,  
Ni ne reomp cas, siouas, evit clévet bemde  
Sermoniou, buez ar Zent, hac exemplou ive.

Allas! nac a oferen bret, na sermoniou iye,  
 Ne gar qet tud obstinet n'o deus doujanç Doue,  
 Na Catekismou da Sul, iye d'ar Gouelyou din,  
 Setu, siouas, an enchou a gundai d'ar goal fin.

Diou gonsideration a rencomp da gayet  
 Evit miret ous an den ne ve qet condaonet :  
 Ar c'henta caret Doue dreist madou ar bed-mañ  
 D'an eil, aon rac an isern, a so carguet a boan

En han' Doue, Christenien, greomp oll orësoi  
 D'ar Verc'hes sacr, Mam Jeüus, bemdez a vir galon  
 D'hon Æl-mat ha Gardien, d'ar Zent ha d'hor Paer  
 Zo hon guir Advocadet dirac Roue an Tron.

Clêvet oo'h eus an histoar, ha mar qeret mire  
 Diouz prodigalite dont da divoal bepret ;  
 Gouennomp digant Jesus hac ar Verc'hes divin  
 Ar c'hraç da vont d'e veuli er Barados er fin.

F I N.




---

ntroulez, e ti LÉDAN, e traon ru ar V